



## CANTIC

*En honor da vrec'h Sant Caourintin*

Saludi'ran var ma daoulin.  
 Ho prec'h santel, o Caourintin;  
 Ra vezo skrivet em ene  
 Hoc'h hano hag ho carante.  
 O va Jesus, guir Vab Doue,  
 Cant mil bennoz d'ho majeste,  
 Da veza roet da Gemperis  
 Eur vrec'h ker crenv en hoc'h Ilis!  
 O Sant Caourintin, hor guir dad,  
 Me ho salud a galon vad;  
 Lakit ho prec'h var ma c'halon  
 Ha scuillit ho pennoz varnon.  
 Roit, va Escop, me ho suppli,  
 Eun amzer gaer d'hoc'h escopti;  
 Roit d'eomp-ni oll eur blavez mad  
 D'ho servicha a galon vad.

D'ho ti ez inn, Sant Caourintin,  
D'ho saludi var ma daoulin ;  
D'hoc'h henori, ar Gernevis  
A ielo bep bloaz d'hoc'h ilis.  
Gant ho prec'h crenv ha ne dorr ket,  
Mirit ar Pab, hon Tad caret;  
Mirit ive hon escop mad  
En em offr d'heoc'h a galon vad.  
Gant ho prec'h, Pastor benniget,  
Diouallit ato ho tenvet;  
Beillit var escopti Kerne  
Ha dalc'hit-hen e græs Doue.  
Diouallit an oll Gernevis  
Zo guir vugale d'an Ilis;  
En heur ar maro pa vezinn,  
Ho prec'h nerzuz discouezit d'inn.  
Ganthi recevit ma ene  
Ha cassit-hen dirac Doue,  
Cassit-hen d'am Zalver Jesus  
Dre zaouarn he vamm druezuz.